

KANTIK SANTEZ BARBA

Var don : *Bosen Elliant*
pe *Rumengol*.

DISKAN :

*Santez Barba hor patronez,
Plijet ganeoc'h 'n ho madelez
Pedi evidomp Hor Zalver/
M'hon diouallo e peb danjer.*

Guerc'hez ha merzerez santel,
Ni zeu da c'houlen ho skoazel ;
Ezom hon euz e pep mare,
Euz ho skoazel dirag Doue.

Aliez hon euz meritel
Beza gant dorn Doue skoët ;
Deut d'hor miret diouz ar poaniou
A denn varnomp hor'pec'hejou..

Kreiz an arne, pa-z-omp spontet
Gant ar gurun hag al luied,
Buhân varnomp plijet asten
Ho torn galloùduz, d'hon difen.

P'e guir ho kalloud a zo braz,
Eur goulen all e rafomp c'hoaz :
Mirit an dud hag ho madou
Diouz an tan-goall hag he reuziou.

Mirit anezho, dreist pep tra,
Mirit anezho da goueza
E kreiz an tan zo bet c'houezet
En ifern 'vit an dud daonet.

Ho pedi a reomp c'hoaz ouspenn
Da ziouall ar vengleuerien ;
Bezit 'n ho micher danjeruz
Ho fatronez trugarezuz.

Diouz toliou ar maro treitour
Ho diouallit 'kreiz ho labour.
Varnho plijet beilla bepred
'Vit na zigouezo drouk ebet.

Pa vo tostik fin hon amzer,
Goulennit digant Hor Zalver
Ma vimp maget, araok mervel,
Gant he gorf hag he voad santel.